

GWERZ NEVE

ZAVET ENN ENOR DA

ZANT VAURIS

*Euz a behini ar chapel, e parrez Zan-Vêk,
a zo meurbet hentet gant ar gristrenien vad.*

WAR DON : *Ni ho salud, Stereden vor.*

DISKAN : O Zant braz ebarz ann envou
Goulennet evidomp grasou !
Nerz ha iec'hed, peoc'h ha pardon,
Karante Doue 'n'hon c'halon !

1. Chilaouet, m'ho ped, Bretonet,
Bue eur Zant, eun den kalet,
Bue Mauris, soudard Jezuz,
Ha mignon ann dud ankeniuz.
2. Enn eur glevet he oll boaniou,
Skrivomp don enn hon sperejou,
Ema red evit mont d'ar gloar,
Andur gand fe war ann douar,
3. Goude hon Zalver daou-c'hant vla
Ebarz enn plenen Agona,
E kichen Frans, eur vro brudet,
Mauris a zo bet merzeriet.
4. Ann impaler Maximian,
Eur prins dirollet ha paian ;
A c'halvaz Mauris da vonet
D'ar brezel gant he zoudardet.
5. N'en devoa ket enn he arme
Gwelloc'h zoudarded evit-he :
Prest da zenti ha da gerzat
E kreiz ann tan hag ar gombat.

6. Ouspenn, Mauris hag he vanden
A oa start el lezen gristen,
Hag enn eur dougen ar c'hleze,
E vevent e doujans Doue.
7. Gant he fals doueou dallet,
Ann impaler, p'en deuz klevet
Leun a fulor hag a gounar,
A glask Mauris, hag a lavar :
8. *Petra glevann-me, kabiten !
C'houi, skouer ann armeou romen,
A dilese hep mez ebed
Doueou Rom, mestrez ar bed !*
9. *Mauris, Mauris, ma chilaouet,
Kenkouls ha c'houi, he zoudardet,
Adoret doueou ar vro,
Pe d'ar vue, pe d'ar maro. »*
10. Raktal, he dorn war he gleze,
He daoulagad war-zu Doue,
Mauris, bepred krenv ha dispont,
Da Vaximian a respont :
11. « *Impaler braz ar Romaned,
Ni zo, gwir eo, ho soudarded,
D'ac'h eo hon c'horf, mes hon ine
Zo bet prenet gant Mab Doue :*
12. *C'houi ro d'imp enor ann armou :
Mes digant Doue ann envrou,
War hon zechou fall pa drec'homp,
E teu kaeroc'h enor war-n-omp ;*
13. *C'houi ro d'imp hon magadurez
Mes Doue, dre he vadelez,
A dalc'h enn hon memproue bue :
Hen da gentan, ha c'houi goude !*
14. *Evid-hoc'h ni skuillo hon goad,
Beteg ann divezan berad :
D'ho toueou, oh ! nann, biken
Na rimp nag ezans na peden !*
15. *Daou dra pel zo hon euz touet :
Karet Doue, hag ho karet ;
Mes, mar disprisfemp hon C'hrouer,
Perak plegan d'hon impaler ?*

16. *Hon breuder hoc'h euz merzeriet,
Evel Jezuz int bet lazet,
Ha gant Jezuz 'n'he Varadoz,
Emant breman ouz hon gortoz.*
17. *Pa c'houlfemp impli hon c'hleze
War-n-hoc'h e trec'hfedmp marteze.
N'ho pet ket aoun, ni a bedo
Evid-hoc'h c'hoaz war ar maro.*
18. *Pa glev ar pañan dinatur
Komjou ken nerzuz ha ken fur,
Ho c'hondaonaz, oll a vanden,
Eno da vervel, enn draouien*
19. *Ar c'habiten, a vouez uhel,
D'he dud a lare, kent mervel,
« Na grenet ket, ma breuder ker,
O pebez gloar, gloar ar merzer ! »*
20. *Ha war ho daoulin, dizarmet,
Ho goug e noaz ho deuz laket :
Ar bourrev a sko didrue,
Ho goad a red gand ho bue.*
21. *Pesort kalon na vije ket
Gand ar glac'har neuze rannet,
O sellet ouz tud a vrezel,
Evel oaned kez o vervel.*
22. *Eled, gant peb a gurunen,
A diskennaz war ann dachen ;
Ha zul tol bourrev e tougent
Eunn ene da balez ar Zent.*
23. *Prestik ive war an douar
E oe anaveet ho gloar :
Ha warlec'h ken hir eunn amzer
Ho feder c'hoaz hag ho meuler.*
24. *E Zan Vek, e kreiz Breiz-Izel,
Zant Vauris en deuz eur chapel ;
Kalz a deu da glask he zikour,
Hag euz he feunten d'evet dour.*
25. *O lec'h a bel-ze benniget,
Gand hon tud koz darempredet,
Zellou Mauris war-n-hoc'h a bar,
C'houi zo he di war ann douar.*

26. Portred ar Zant, he relegou,
He feunteun a ra burzudou ;
O Bretoned, pebez tensor,
E Zan-Vauris a zo digor !
27. C'houi, tud dalc'het gant klenvejou,
C'houi tud poaniet en ho memproù,
Paour pe binvik. e peb mare,
Bet fians enn he drugare.
28. C'houi, pried mad ha mamm dener,
Petra n'euz ket gret 'n'ho kenver ?
Dizec'het en deus ho taerou,
Rentet ar peoc'h d'ho kalonou.
29. Bugelik koant neve ganet,
Den koz gant ann oad diskaret,
C'houi dreist oll, zoudarded ar vro,
Mauris ho kar hag ho karo.
30. Goulennet iec'hed di-gant-han,
Iec'hed ann ene da gentan ;
Ar c'horf, kaer a vez, a gouezo,
Ann ene beprad a bado.
31. Goulennet ma chomo dalc'hamad
Deün ho re-vian war ann hent mad,
Mac'h amzavint evit Roue
Jezuz ho zad hag ho Doue.
32. Ken na vimp eet oll war-ann-dro,
Tud ha bugale, d'hon gwir vro,
Bro ar Zent, bro hon tado koz,
Enn eürusted ar Baradoz.

AMEN ! AMEN !



Brioci, die 3 septembris 1897.

IMPRIMATUR

CHATTON, *can ; vic.-gen.*